

# Meuleudi da Sakramant an Aoter.

Ton : *Jesu dulcis memoria.*

## I

En env ar zent hag an Elez,  
E kreiz ar joa al levenez,  
Assamblez heb ehan morse  
A gân meuleudi da Zoue.



Diskan.

*Ken aliez a vech, kanomp a vouez huel :*  
*Meuleudi, karantez, d'ar Sakramant santel.*

## II.

Bolz an envou great gant Doue  
Evit he veuli noz ha de,  
Livirit d'eomp ped perlezen  
Oc'h euz o lintra 'zioc'h d'hor penn... *Ken aliez*

## III.

Mezou, prajou kaër da velet  
Gant bokedou steredennet,  
Livirit ive en ho iez  
Da bed ieoten e roit buez.... *Ken aliez*

## IV.

Ha c'houi mor glaz doun ha ledan  
Glever o krozal heb ehan,  
Savit ho mouez da lavaret  
Gant ped beraden dour oc'h gret.... *Ken aliez*

## V.

Roue ar bed, heol burzuduz,  
 Ker sklear, ken tomni, ken lugernuz,  
 Ennhoc'h-c'houi piou en euz kountet  
 Ped fulen dan a zo berniet....*Ken aliez*

## VI.

Eternite, oad hon Doue,  
 N'hellaz den muzuli morse,  
 Ped dervez a rank fe beza  
 'Vit kaout hoc'h hed goude r bed-mañ...*Ken aliez*

## VII.

Ha goude beza ho meulet  
 En ho Sakramant ker karet,  
 Grit, Jesus, ma'z aimp d'ho kichen  
 En env d'ho meuli da viken.

Diskan divez :

*Ha da c'hortoz, hirio, kanomp a vouez huel:  
 Meuleudi, karantez, d'ar Sakramant santel.*

L. G.

Imprimatur :

*Corisop. 19 April. 1900.*

FR. CORRIGOU.

Vicaire Général.